



250



# CANTIC SPIRITUEL

en enor


**D'AN ITRON VARI A KERELLON,**

En deveus eur Chapel devot

**EN PARRES PLOUENAN,**

TOST DA GASTEL-PAOL,

EN ESKOPTY LEON.



Var ton : *Guers Santes Barba, pe var eun ton all.*

TRINDET adorabl , me ho ped ,  
Da rei sclerijen d'am speret ,  
Evit ma c'hellin composi  
Eur c'hantic d'ar Ver'hes VARI.

Ho merc'h-u eo , Tad eternal ,  
Ho pried eo , Speret santel ,  
Ho mam-u eo , Salver ar bed ,  
Ganti oc'h ganet ha maguet.

Kement dour a taoler enna  
Ne doa ket capabl d'e vouga ;  
Mes keris en em adressas  
D'ar Verc'hes gant eur fizianç vras.

Eun ofranç a oue gant respet  
D'he Ilis santel dispartiet ,  
En instant e troas an avel ,  
Hac an tan a deuas da vervel.

Ama e zeo bet dilivret  
Cals a dud dioc'h ho foan speret ,  
Hac a re glan rentet salo ,  
Hervez m'on eus desket ganto.

C'hoas e conter miraclou-all :  
Rentet ar gulet d'ar re zall ,  
Ha d'ar re vouzar ar clevet ,  
Ha d'ar re gam ar c'herset.

Ne ve ket eas deomp niveri  
Ar burzudou a zo great enni ;  
Ar brud commun eo kemen-man ,  
Hac e tleer douguen feiz dezan.

C'hui ta entrezoc'h , Bretonet ,  
Mar fell deoc'h beza soulajet ,  
Bizitit gant devotion  
Ty ar Verc'hes a Kerellon .

Er chapel-mâ da bep sadorn  
Ho pezo cant dervez pardon ,  
Hac e zeus ive cant dervez  
Bep solenite d'ar Verc'hes.

Eur pardon bras zo enni c'hoas  
D'an eil zul a vis maë bep bloas ,  
Rac an induljançou plenier  
A zo neuse da bep pec'her.

Mes evit gounit ar pardon ,  
E renkit caout en ho calon  
Eur guir regret d'ho pec'hejou  
Ha receo ar sacramanchou.

Mes evit caout remission ,  
Livirit gant devotion  
D'ar Verc'hes al litanion ,  
Da enori ar relegou.

Fors relegou a zo amà ,  
Precius mar d'eus er vrò-mà ,  
Ervez testeni eur billet  
Hac a zo ancien meurbet.

Er memor coz mà e lenner  
E zeus a vir groas hor Zalver,  
Eus ar serviet e dorchas  
Treit e Ziskibien p'ho goalc'has.

Eus e sæ ven, eus e vantel,  
Eus a zillat e Vam santel ;  
Goude eus a groas Sant Andre ,  
Eus a eskern Sant Berthele.

Eus a re Sant Paol , Abostol ,  
Eus a c'hlin Sant Jacques minor,  
Eus a habillamant Sant Vase ,  
Hac eus e relegou ive.

Sant Stephan , Georg ha Sant Lauranç ,  
Brassa relegou zo e Franc ,  
D'ar fin eus a re Sant Eozen ,  
Hac eus e roket c'hoas ouspen.

Chetu ama eun tensor caër,  
Mar d'eus er vrò hac er c'hartier,  
Hac a rent Chapel Kerellon  
Enorabl bras ê peb feçon.

Ar Relegou-mà a ves douguet  
An eil sul a vis maë bepret ,  
Etre Plouenan , ar barres ,  
Hac ar Chapel-mà d'ar Verc'hes.

Me ho convi ta , Leonis ,  
Kernevis ha c'hui Tregueris ,  
Da zont da Chapel Kerellon ,  
Ma c'hellot gounit ar pardon.

Evit adori ar guir Groas ,  
Evit enori ar Sænt bras ,  
Hac evid pedi ar Verc'hes  
Da veza deoc'h Avocades.

Hoguen , diouallit , me ho ped ,  
Na raac'h fallagries ebet ,  
Na c'hounessac'h e leac'h pardon ,  
Nemet ho condoanation.

Assistit er servich divin  
Gant eun disposition din ,  
Cofesaït ha communiit ,  
D'ar Sænt en em recomandit.

Dreïst peb tra goulennit outo ,  
Ma teuot da veza eveldo ,  
Sobr , chast , oboïssant ,  
Pur , humbl , douç ha patient.

Dre an evelep moyennou ,  
E c'hounezot ar pardonou ,  
Evellen e rentot fidel  
Ho respet d'ar plaçou santel.

Pebes graç deoc'h , Plouenanis ,  
Caout en ho parres eun Ilis  
A zo ker privilegiet ,  
Ha da Vam Doue dediet,

Rac-se likit evez ervat ,  
Na veac'h ouc'h ar groas ingrat ,  
Hep exerci en he andret ,  
Eur guir devotion bepret.

An evelep devotion  
A brezeguis em station ,  
O sarmon deoc'h er chapel-man ,  
Eun nombr bloaveziou zo breman.

Neuse deoc'h e recommandis  
Mont da sacramanti bep mis  
Evit en em derc'hel è stat  
Da veza dar Verc'hes deut mat.

Goude bep sadorn ha bemdes ,  
Rei dezi eus ho carantes  
Eur merk bennac oc'h e fidi  
Da gaout achanoc'h ar sourci.

Na vijac'h james diegus ,  
Pa gleffac'h cloc'h an *Angelus* ,  
Teir guech en deis da lavaret  
Teir guech an *Ave* , gant respect.

Recita he litaniou ,  
Ackuita he breuriesiou ,  
Ma raje deoc'h digant he map.  
Ar c'hras da gaout eur maro mat.

Ha pa vijac'h importunet  
Gant goall dentation ebet ,  
Guervel ar Verc'hes d'ho sicour ,  
Evit trec'hi oc'h adversour.

Ma c'himitjac'h he furete ,  
Ha kercouls he humilite ;  
Rac disagreabl veac'h dezi sur ,  
Mar beac'h na superb , nac impur.

Chetu petra recommandis  
Ama deoc'h-oll , Plouenanis ,  
Ma vijac'h devot dar Verc'hes  
Ha ma e fetjac'h alies.

Rac Mari nep a servicho  
Biken james ne perisso ,  
Herves ar santimant commun ,  
Eus a behini ne zouët nicun.

Nevesit ho devotion  
Hac ho pet an intention  
D'am recommandi me ive  
Dar Verc'hes sacr, maïn da Zoue.

Itron Vari a Kerellon ,  
Ny ho ped a greis hor c'halon  
Da intercedi evidomp  
Ho servicheryen baour ma zomp.

Obtenit deomp ar vertuziou  
Da veza treac'h dau oll viçou  
Ha da conformi hor buez  
Dioc'h oc'hini , mam a druez.

Dreïst peb tra en heur ar maro  
Pellaït Satan divar hon tro ,  
Ma c'halfomp mervel è repos ,  
Ha mont gueneoc'h dar barados. — *Amen.*

